

— 8 —

Mari Beg Arok

**Ma oc'h euz c'hoant, va mignoned, da anveout eur vreg rok
 Me ho konduo, pa garfet, dirag Mari Beg Arok.
 Bemde war dro eun hanter heur e kluch wardreujou he dor,
 Kerkent teodou pig ar c'hartier, ganteurs skaon pe eurgador
 A zired oll en he c'hever : an odians zo digor.**

**War barlen Mari, e weler eur pez foeltren assied,
 War behini kont peb komer kement he deuz inventet.
 Klevet a ret peb den lipous a ia bemde d'ar c'hafe,
 Ped plac'h he deuz tri amourouz, ha ped a zo stad ennê,
 A ped ozac'h a zo mêtvier, ha ped a bil o grage.**

**Mari Beg Arok a gomand war ar c'honsaill divragou,
 Heb kaout an nebeuta damant e tigor frank he genou.
 Pa n'he deveus war he bizach na moustachou na baro,
 Eor red d'ai kaout an avantach da zikrial tud ar vro.
 Gevier, sotoni, koz langach, tud a bed kalite zo.**

**Mari Beg Arok zo titred vel an uhella noblaz
 Domach eo na oa ket pried d'eun den pinvidik a Frans.
 Hi eo prinsez an diegi, kontez al liboudennou,
 Hi eo dukez al loustoni, markizez ar strakellou
 Gouarnerez ar jolori, ha baronez ar pillou.**

**Kerkent a ma ve embannet daou zen iaouank da zimi,
 E ve d'al lun vintin galvet he c'honsaill braz gant Mari.
 Peb konseiller en gweleden a boign gant he voutou bêr
 Evid klask ar gwella moïen da derri prompt an affer :
 Ar plac'h a gar ar jigoden, pe ar goaz a zo mêtvier.**

**Kerkent ha ma wel eun eureud o tond war zu an iliz
 Mari Beg Arok a zired en manchou louz he hinviz.
 Evel eul vioc'h o vreskin e c'haloup o-biou ar ru :
 « Hola ! Katell, Jannez, Perrin, Soaz, Mac'harit, deut dustu !
 Setu ama eureud Martin ! Demp da dremen ar revu.**

**Va c'homer, sellit euz hounnez, dislivet he davanger,
 He c'hornetten zo hep ampez, ha he gweleden re verr.
 O ! Sellit 'ta eus an den-ma, pegen striz eo e vrugou,
 E dok zo braso'h évitan, ha kalz re hir e voutou ;
 Eur chemizeten zo gantan war e roched en pillou !**

— 9 —

Pa ve eur vreg kez gouilioudet divar he bugel kenta,
 E c'houlen Mari, estonet : « Petra, nao mis zo dija ?
 Me ' gave d'in oa an eureud d'al lun warlerc'h Pardon Pol,
 Ha Pask n'eo ket c'hoaz erruet. Allo. gret o deus an toll.
 Hep n'o deveus va c'hemennet, a kement-se 'gavan drol. »

Pa gleo kloc'h iliz ar barroz o c'hervel d'eur vadiant,
 Mari, gant eun troad hep botez, a erru arok ar chant
 Mezdrevaleurn'ens ket ezom demeus eur vouez ken raouiet
 Da zikour kana *Te Deum* evid an neve ganet.
 Gant he c'homerezed renk chom e-kichen dor ar veret.

PROSPER PROUX.

Bro-Goz ma Zadou



Ni Breizis a galon, karomp hon gwir Vro !
 Brudet eo an Arvor dre ar bed tro-dro.
 Dispont kreiz ar brezel, hon zadou ken mad,
 A skuillaz eviti o gwad.

DISKAN :

O Breiz ma bro ! me gar ma Bro
 Tra ma vô mor 'vel mur 'n he zro,
 Ra vezd digabestr ma Bro !

Breiz, douar ar Zent koz, douar ar Varzed.
 N'euz bro all a garan kemend 'barz ar bed.
 Pep menez pep traonien d'am c'halon'zo kaër
 Ennê kousk meur a Vreizad têr !

Ar Vretoned a zo tud kalet a krenv ;
 N'euz pobl ken kaloneg a-zindan an nenv.
 Gwerz trist, sôn dudius a ziwan eno,
 O ! Pegen kaër ec'h out, ma Bro !

Mar-d'eo bet trec'het Breiz er brezelliou braz
 He iez a zo bepred ken beo ha biskoaz.
 He c'halon birvidik a lamm c'hoaz 'n he c'hreiz
 Dihunet out brema, ma Breiz !

TALDIR.